



# CANTIC

## EVIT DIGUERI AR JUBILE.

Var ton : *Serez-vous donc, etc.*

**P**ORRE e zed d'oc'h, pec'her, } bis.  
Distrei, oc'h ho Salver.

En em rentit pelloc'h hep appel.  
Da vouez an Auhon souverain ;  
Fell a so e ma' ons ho qevel ;  
Grit n'er grayo pelloc'h e van.

Poent.

Penaus ! vit u' falk plijadurez  
A gaver ebars er pec'hell,  
E fell deoc'h-hi evit ne james  
Beza oc'h. Doue-separet !

Poent.

En eo hon Mestr leun a vadélez,  
En eo hon Bannet, hon Doue,  
Hoc' oc'h eus c'hoas an hardseguez.  
Da zont d'ev offnoni beude !

Poent.

Anavezit hoc'h ingrateri,  
Deplorit hoc'h eus pec'hajou,  
Ha demeus ho customou impi.  
Brizillonit ar chadennou.

Poent.

Mar oc'h eus heuillet bete vrema.  
An hent rust dameds ar pec'hell,  
E so' oc'h ebars en danger brassa,  
Ha gouzouda' ne songit qet.

Poent.

Bars en un etat qen horrerus,  
 E trista stat ma hoc'h ene!  
 Seblantout a vit beo ha joaüs,  
 Mes maro oc'h dirac Done. Poent.

Abers e justic e verilit  
 Ar brassa punitionou;  
 Certen e goler, ma na chenchit,  
 Prest ho gargo a c'houliau. Poent.

Ma teulle ar maro d'ho surpren,  
 Da lemel digueneoc'h ho pue,  
 E zai hoc'h ene d'an ifern:  
 Ha na songit-u qet en ze? Poent.

Penaus-bea qen disqiantet  
 Var sujet an tan eternal  
 Da bini e viot condaonet,  
 Mar marvit er pec'het marvel? Poent.

Vit sortial eus hoc'h esclavach,  
 Grit eta hoc'h oll effortchou;  
 Rac mar differit c'hoas davantach,  
 E teui creoc'h ho chadenou. Poent.

Ah! pec'her paour, danvad egaret!  
 Perac-ta differi hiroc'h?  
 Hemàn eo an eürosa moment:  
 E ma Doue ouc'h ho cortos. Poent.

Na scuizit qet ar baciantet  
 Nac ar vadelez a Zoue,  
 Rac asstir e viot punisset,  
 Mar disprisit e garante. Poent.

Gant ur güir glac'har d'ho pec'hejou,



Deut eta buan d'e gavet :  
 Un tad eo leun a vadelezon ;  
 A dra sur n'ho refuso qet.

Poent.

## ABARS AR GONFERANÇ PE AN TAULENNOU.

Var ton : *Venez, venez, Esprit-Saint.*

**S**PERET-SANTEL. Spetet a sclêrigen,  
 Deut... bisilit ho cuir servicherien :  
 A sclêrigen carguit hor sperejou,  
 A garantez tommit hor c'halonou.  
 An Ebestel en ur zal assamblet,  
 A dâñ ho craç oc'h eus bet anflammet ;  
 Bet evidomp ar memes madelez,  
 Ne domp, siouas, nemet sempladurez.  
 Gret deomp brema clêvet ar gouferanç,  
 Gant modesti ha gant perseveranç,  
 Evit disqi sclêramant ho lezen,  
 Ha goude-se e miret da vigen.

*Mar deo an Taulennoù, e leveren :*

Grit deomp compren ar pezh a represent  
 An Taulennoù a zo amañ present,  
 Evit guelel ar stat eus hor c'houstranç,  
 Ha goude-ze beza en ho toujanç,

*Action a C'hrac.*

Me rent graç deoc'h, va Jesus, va Doue,  
 M'oc'h eus roet sclêrigen d'am ene,  
 Ha da veza imprimet em c'halon

Ar reglennou ens va religion.

Grit din ar c'hrac, va Jesus, ano ho ped,  
 Da bratica ar pezh a meus disquet;  
 Grit din beza eur servicher fidel,  
 Ma jouissin ens ar gloar eternal.

### SANTIMANCHOU AR PEC'HER PENITANT.

*Var ton : J'ai peché dès mon enfance.*

**A**VIANIC e trous pec'het.

Hac ollancet va Doue;  
 Va ene paour ameus lazet;  
 Ah! pebes maleur din-me!

Piou a chencho va daoulagad  
 Ea tiou zourcen a zaelou,  
 Da implori va Doue mad  
 Coleret ouc'h va c'hrinou?

Dre ur follentez insanset,  
 Hac un arrach deplorapt,  
 E zoun va-unan en em gollet;  
 O maleur incomparabl!

Ah! gueehal e voan agreabt  
 Da dri ferson an Driadet;  
 Bremâ, pec'her abominabl,  
 E zoun esclav d'ar pec'het.

Imprimet e voa ho hanvou  
 Var va ene innoçant;  
 Bremâ e zeo leun a viçou.

Atlas ! pebes chenchamant !

La, evit un-netra, siouas,

E meus bet sacrificet

Madon ha n'o devoe biscoas

O fris etoez traou ar bed.

O saë caer eus va badiziant !

Ne meus biscoas comprenet

Ar pinvidiguezou charmant

A here e voac'h ornet.

Graç, va Jesus ; graç va Zalver,

**Tenzor ar preciussa :**

Petra ha penaus da ober

Evit hoc'h acquisita ?

Perac, Doue oll-buissant,

N'oc'h eus-hor get permetet

E vigen, deiz va badiziant,

Marô, en donar rentet.

Rac neuze sur, ô va Doue !

N'em bize get meritet

Coler va Mestr ha va Roue,

Evel m'am eus çant guéch grêt.

Mignonet traitour d'am ene,

Va brassa ennemiet,

Nac a c'hlac'har a goust din-me

Ho peza anavezet !

Teodou distrempet er poesou

Deus ar pincin infernal,

C'houi ec'h eus souillet va c'halon

A hep seurt gentellion fall.

Bete re e meus profitet  
 En ho scol pernicious ;  
 Bete re e meus imitet  
 Hoc'h exemplon maleurus.

Bete va c'halon int bet et ;  
 Evel griet int ouzin ;  
 D'ho zrec'hi , va Zolver binigret ,  
 Roit eur sicour benac din.

Deus an abimou estonet  
 Grêt gant va oll hec'hejou .  
 Me zavo va moüez truezus  
 Da implori ho craçou.

Humiliet en ho presanç .  
 Hep creñi sellet onzoc'h ,  
 Eus va oll disoboissanç  
 Me c'houlen pardon diganeoc'h.

Stouet gant mez ha gant estow  
 Amâ , betec an douar ,  
 E skoân va boull var c'halon  
 Dirazoc'h , Doue a c'hloar.

O va Doue ! roit d'am lagad  
 Daëlou ar güir biuigen ,  
 Grit din gouëla a galon vad  
 Va dizurziou da vigen.

Grit din eo em gassât bepret ,  
 Hep james eo em espern ,  
 Ma c'hillin beza preservet  
 Dious poänniou an isern !

Me eo au darvad diaque

7  
Va recevit, ô va Zad!  
Me vo fur en amzer da zonet,  
Me a zistro evit mad.

Pardonet oc'h eus da Sant Pêr,  
Hac ive d'ar Vadalen;  
Pardonit din, ô va Zalver!  
N'oc'h offancio mui bigen.

---

## CANTIC

*Var ar seiz Station eus a Bassion hor Zalver  
JESUS-CHRIST.*

**M**AR qirit ober Orêson  
Da Jesus-Christ en ho calon,  
Grit peb sizun seiz Station  
Da gontempli e Bassion.

D'ar Sul en ho calon dresset  
Da Zoue ur Jardin Olivet;  
Sellit en creiz Jesus hon Tad,  
O c'huesi an dour hac ar goad.

D'al lun en hoc'h interior  
Grit da c'hloar Doue un Auditor;  
Savit en e greiz ur piller,  
Ma vo scourgeset hor Zalver.

D'ar meurs e guelec'ho calon  
Grit ur zal d'hon Roue guirion,  
Curunet gant ur gurunen spera  
D'hon delivra eus an isern.

D'ar merc'her en ho calon gret  
 Ur porchet, ma vo discuezet  
 Gant Pilat d'ar bobl arraget  
 Mab Doue, Jesus a Nazareth,  
 Gant ur guronen spern var e benn,  
 Eu e zorn deo ur gorzen.

Eus ho calon leun a c'hlaç'har  
 Grit d'ar yaou ur memes Calvar  
 Ma vezo Jesus o tougen  
 Ar groas evit ar becherien.

Eus ho calon leun a c'hlaç'har  
 Grit oll da vener ur c'halvar;  
 Ma vo Jesus crucifiet  
 Evit hon lemel a bec'het.

Eus ho calon leun a c'hlaç'har,  
 Dresset da sadorn ur c'halvar:  
 Adorit Jesus gouliet  
 A zo eus ar groas disjennet:  
 Adorit Jesus gouliet  
 E barlen e Vam glac'haret.

FIN.



E Montroulez, e ty LEDAN, e traon ru ar Var.